

Dizano

Taolenn

Moueziou ar vered.

Nell

Trist e son klehier ar barroz
An evn a gan 'mesk ar bleun roz.

Evid an noz e' maro Nell,
Nelli vihan, dous evel eun êl.

Dous 'vel eun êl, koant 'vel bleuniou,
Ha pur 'vel dour ar feunteuniou.

'Barz ar vered 'oa bet kavet,
Ha gand an touller bet savet.

An touller koz, e-eun en e di,
'N-oa bugel, na den nemeti.

Hag adal am helle kerzad,
Nell 'yee d'ar vered gand he "zad".

C'hoari a ree war ar hlazenn,
Diarhen-kaer, 'mesk ar hlizenn.

Ha Nell a greske, fur ha mad,
Mad ouz an oll ha fur dalhmad.

Me he gwel c'hoaz, 'vel he gwelen,
'Gand he sae hlaz, he ble' melen.

He ble' melen, war he diouskoaz,
Ha koant 'vel na welis biskoaz.

Moned a ree 'hed ar hleuniou,
Bemdez, bemdez, da glask bleuniou.

Bleuniou spern-gwenn, ken mad o hwez,
Bleuniou drez-amgroaz en o zouez.

Bleun prajeier, a glaske c'hoaz,
Ha bleun lili-dour deuz ar waz.

A-zornadou 'vijent serret,
Da gas war veziou ar vered.

« 'Vid ma beziou, ma beziou ker,

Me 'glask, emezi, bleuniou kaer. »

Er vered, kempennet ganti,
N'oa ket eur bez heb bokidi.

Ha 'vid an noz e' maro Nell,

D'ar Baradoz 'zo eet eun êl.

Trist e son klehier ar barroz,
An evn a gan 'mesk ar bleun-roz.

